

KANTIK            S A N T    Y A N N .

--o-o-o-o-o-o-o-o-o-o--

Diskan

Sant Yann, tad iliz Lannuon,  
Gret ma heuilfomp a greis kalon  
Lezen Doue, vel hon zud koz,  
Wit mont eun de dar Baradoz.

I

Mab da zantez Elisabeth,  
Sant Yann, dre vurzud oa ganet,  
Hag e dad, herve ar vro,  
Dlee rei d'hezan eun hano .

2

Sant Yann, pe oa bugelik c'hoas,  
A c'hez da chom en eur c'hoat braz:  
Eno tremene e vue,  
Er binijen, er baourente.

3

O zant Yann, tad hon zado koz,  
Warnomp-ni skuillet ho pennoz,  
Teurveet, hirie, hon diwal  
A bep drouk'vel hon zud gwechall,

4

Rag hon c'halon, vel ho hini,  
Zo stag ouz ilis ar Baly;  
Na zo neblec'h ilis ken Koant,  
Vel iliz koz ma badeiant.

5

Reit ho pennöz d'ar vam, d'an tad,  
Gret ma rofoïnt, dre oll, skouer vad,  
Roet d'he iec'het ha furnez,  
Wit ren ervad ho ziegez.

6

Wit, en ho foan, vo stad enhe,  
Gret vo zentus ho bugale !  
Ma chomo fur ar iaouankis,  
Stag ouz Doue, ous an ilis !

7

Miret bugale Lannuon  
C'hone bara war ar mor don,  
Eus an avel hag ar reier;  
Gret ma tistrofoïnt iac'h d'ar ger.

8

Dalc'het dreit oll beo en hon c'hreis  
Ar fe a ra enor hon Breiz,  
Gret ma lugerno, vel gwec'hal,  
Kroas hon badeiant, war hon zal.

-o-o-o-o-o-o-o-o-o-o-o-